

Kantig Sant-Egat

Ton : *Eurus an hini...*

DISKAN

Egat beniget, patron ar barrez
Roit de Blegadiz feiz ha karantez. (bis)

ISTOR

Bugelig sentus, potr a galon vat
Ho furnez a gresk dre ma kresk hoc'h oad.

'Vel eul lilien ho kalon dinamm
A ra levenez ho tad hag ho mamm.

Er skol gant ho mamm ha war he barlen
Abred e teskit al lezen gristen.

Deut da bôtr yaouank e verv en ho kreiz
Evit ho Salver karantez ha feiz

Enep d'an Iliz pa grog ar brezel
Dispont e chomit daoust m'eo ret mervel.

Yaouank evelkent, tener ez oc'h c'hoaz
N'hoc'h eus d'ar c'houlz-se nemet pemzek vloaz.

Met gouzout a rit : « gwad ar verzerien
A lak da sevel eun eost kristenien. »

Embann a rit krenv dal-penn d'ar barner :
« Me zo da Jezuz, va Mestr, va Salver. »

War urz ar barner, puilh ha didruez,
E kouez war ho kein an toliou skourjez.

Klask a rit konfort e nerz ar beden
Ha pemp kant pagan en em ra kristen.

Hed pevar devez ho kastiz zo kri :
Eur prizon tenval hep tamm da zebri.

Tennet a brizon, duet gant an naon
Laket oc'h e noaz hag ho penn d'an traon.



Ha dindan ho penn, labour ar bourreo
A zo c'houeza tan da suilha ho pleo.

Kement a voged hoc'h eus da lonka
M'emoc'h hep dale warnez distronka.

Evit an eil gwech an toliou leren
Hep damant d'ho poan a flemm ho kroc'hen.

Daoust d'ho poaniou kriz, eus hoc'h holl ene
E kasit d'an nenv mil « Bennoz Doue. »

Evit kreski c'hoaz ho kalir c'houero
E skuilher ennoc'h lommou dour bero.

Heuzusa torfed 'touez an torfedou,
Brevet eo ho tent hag ho chavedou.

O kastiz an nenv !... Ho parner garo
A zo diskaret gant falc'h ar maro.

E-unan neuze dont an impalaer
Da glask ho kounit dre heg pe dre gaer.

Daoust d'e gomzou rust pe d'e gomzou flour
Biken ne sentoc'h ouz an enebour.

Pa z oc'h d'al loned tolet evel preiz,
Holl ehars ho treid e c'hourvezont reiz.

Pa chom hep plega d'ar burzud dispar
Dall hag aheurtet eo spered Sezar.

Ganec'h ne c'hoar mui penos en em denn
Pa ra d'ar bourreo troc'ha d'ec'h ho penn.

Dirak hoc'h ene, hep chom da c'hortoz,
E tigor Jezuz dor e varadoz.

PEDEN

Merzer kalonek, hio ni ho ped
War dud ar barrez da veilha bepred.

Lakit en hor c'hreiz, kalon eur merzer
Kristen e pep lec'h hag e peb amzer.

Grit ma vimp bemde feal d'ar beden
Aketus bep sul da gaout oferen.

Tolit ho skoazel war ar vugale
War hent ar vertuz deskit d'eo bale.

Lakit en o fenn sklerded ar greden
Hag en o c'halon sec'hed ar beden.

D'ar yaouankizou digasit furnez
Ma vezint dinamm a bep hudurnez.

'Tre ar priejou lakit karante
'Vit ma vo ganto kresket ar vuhe.

Sikourit ar vamm, sikourit an tad
D'ober mat ato déveriou o stad.

D'an holl glanvourien ha d'an dud en oad
Goulennit, d'ar c'houlz, gras em maro mat.

E pep tiegez, zoken e pep ti,
Grit d'an holl gerent en em unani.

Er barrez a bez, eus eur ger d'eun all
'Tre pinvig ha paour lakit peoc'h leal.

Pellait diouz Franz ha diouz Breiz-Izel,
Evit pell amzer dremm glas ar brezel!

Ma vefemp taget lakit en hor brec'h
An nerz a vo ret evit kaout an trec'h.

Pa zono 'vidomp eur an tremenvan
Astennit ho torn da zousat hor poan.

Hag eur wech maro, deut warnomp an noz,
Roit da bep ene gloar ar baradoz

Imprimatur

P. MESSEGER,

V. G.

Quimper, le 8 Juillet 1939.